

HISTOR ADMIRABL DEMEUS AR BOUDEDEO



Pehini, abaoue maro hor Zalver, ne ra nemet bale nos ha deiz ac'hann da fin ar bed, abalamour d'an effronteri an devoa bet en andret hor Zalver Jesus-Christ, pehini, pa voa o vont d'ar maro a falvezas dezán disquiza var e stal, hac e teuas d'en rebuti evel eur scelerat.

Var ton : *Cuerz Santez Anna*

Asistantet enorabl, tostaît da glêvet
Ar vuez pitoyapla a voe biscoas er bed ;
An histor zo trneuzus demeus ar Boudedeo,
A zo nôs-deiz o vale aboeñhor Zalver maro.

F
U

— 2 —

Eus a tribu Nephtali, a guêr Jerusalem,
 Voa ganet Absa ius, carguet a anathem ;
 Dont a ras ar bed-mâ en amzer Herodes,
 A felvas massacri Jesus, Mab ar Verc'hez.

Va zad a voa ur c'halve, va mam kemenerez,
 Hac a laboure en Templ da ober broderes ;
 Ha va c'herent am desqas da lenn leor al lezen,
 Hac hini ar Brofetet iveau a dra certen.

Goude e voen demeet gant va c'herent afin,
 Da eur vreg fur a prudent a tribu Benjamin,
 A bini'm boe tri buguel en amzer ma teuas
 Autrou Sant Yan Badezour d'annonç ar Messias.

Sant Yan a gconvertissas calz eus ar bayonet
 Pere voa idolatret, caledet er pec'het :
 Dec mil den en eun devez en deveus badeet,
 Me, va greg, va bugale e voamp bet o velet.

Va greg a lavaras din : va fried, emezi,
 Lekomp en em vadezi, enont ê ar Messi ;
 Ha me o respont dezi gant un ear direspet :
 Na ni nac hor bugale ne vimp qet badeet.

Aben eun nebeut goude Sant Yan voe dibennet
 Dre urz roue Herodes, eun den cruel meurbet,
 Ha ma teuas hor Zalver evit rên en e blaç ;
 Hac a ras dre ar c'hanton calz a viraclou bras.

Clévet e meus bet Jesus alies o sermon,
 Hep ne meus bet profitet eus e bredisation ;
 Va-unan e voa presant p'en doa rassaziet,
 Dec mil den gant pemp bara ha goudeze pesquet.

Me Boudedeo maleürus a velas c'hoas soudan
 Jesus o ressncita Lazar, breur Madalen,
 Ha güelet dibosseidi calz a dud possedet,
 Ha sivoas din, pec'her bras, ne meus tam profitet.

— 3 —

Aben eun nebeut goude voe Jesus kemeret,
 Gant calz eus a judevien er jardin Olivet,
 A condaonet gant Pilat da rancout da zougouen
 Ar groas ponner ha mezus evit ar bec'herien.

Pa voe ar groas achuet, hor Zalver voe samet,
 Da vont da venez Calvar d' vea crucifiet :
 O velet an dud o redec, me guemer va buguel,
 Ha me mont da dal an nôr pa yê en da vervel.

Cetu Jesus o tremen neoze abiou va zi,
 Peluni en tal va stal a deu da reposi.
 Ha me lavarat deàn eant eur goimz arrogant
 Qè alesse d'ar maro, pe c'heus he meritet.

Ganes òn dizenoret gant da iffronteri,
 Pa quielan o reposi amân e tal va zi :
 Querz alesse, den ingrat, eos soreer milliguet,
 Querz alesse, d'ar maro, pe c'heus he meritet.

Jesus a resbontas din gant eur voez truezus :
 Mont a ran da haëtia, den fall, den maleürus,
 Me reposo gant va Zad, te valeo bepret
 Dre bêvar c'horn ar bed-mâ ac'han da fin ar bed.

Ia, te valeo ac'han d'ar jujamant,
 Hac er c'hoste deo d'am Zad am velo suramant,
 O varni ar bec'herien pere vo condaonet,
 Da vont d'ar flamou gries, ar re just d'ar joaüstet.

Pa glêvis comzou Jesus, va c'halon voa touchet,
 Ha me rîi va bugale eun instant d'a nî pried,
 Ma velis ar Veronic o see'hi bisach Jesus,
 Ha chom en he meuchouer e boltret truezus.

He ellout n'em arrêtî e heuillis hor Zalver,
 Hac e velis va Jesus ha calz graguez santed,
 Ar bournrevien d'ar Verc'hez o deveus lavaret :
 Cetu amâ an tachou ma vo ho Mab staguet.

— 4 —

P'am boe güelet hor Zalver o verval var ar groas,
 E creiz etre an daou laer carguet a boanniou bras,
 Ha me commanç va beach gant calz eus a anquen,
 O tont da laret adieu da guær Jerusalem.

Sonjît eta, Bretonet, peguement a c'hlac'h ar
 En deus ar Boudedeo bremà var an douar !
 Rancout quittat e gartier, e vreg, e vugale,
 Hep qimiadi dioulo, evit atao hale.

Pa en devoe baleet eun nombr a vlavezioù,
 Ec' éruas en Egypt, pel bras demeus e vrô,
 Eno e mât ar Môr-Rus, elec'h moe tremenet,
 Moyses gant pobl Doue, hep cavout drouc ebet.

Mont a ris eus ac'hane da enezen Candi,
 Elec'h emedi en noas an dud a zo enni ;
 Eno e velis eun tad o treec'hi a damou,
 E verc'h evit sacrific da rî d'o doueou.

Mont a ris da Malhodo, e pelec'h eus tud drol,
 Pere a ador Doue hac an diaoulou oll ;
 Pedi reont Done da gaout prosperite.
 Hac an diaoul a bedont ne rai qet drouc dêze

Güelet e meus er Jâdon ur vam meurbet cruel,
 Pini 'deuas da laza, sivoas, e daou vuguel,
 Er vro-zê è permetiet laça ar vugale,
 Pa n'o deus ket a vara da rî dêze.

Goude kemeris an hent da vont d'an Enezi,
 D'an Americ, d'an Asi, ha nouze d'an Turqi,
 Ar graguez eus ar vrô-sê a vale d'au arme,
 Hac an ozac'h o deus soign demeus ar vugale.

Eno emedi ar c'biz da laza ar botret,
 Nemet unan dre famill na ve James miret
 Bez'o deus eur rouanez a ro commandamant.
 Da laza an oll botret, hep caout dê nep damant.

— 5 —

Er guær eus a Garniol eus ur c'his drol meurbet
 Rac eno an dud yaouane, pa vezont euregjet,
 E rânce ar vreg yaouanc, nôs qenta e heured,
 Mont da gousqet gant ar prinç, vit bea enoret.

Bet on ebars eur c'hood hanvet Cisarla,
 Elec'h ma eller bale cant léo d'an nebeuta,
 Hep cavet dour da eva, na feunteun, na rivier,
 Ar pez zo goal incomod da oll dud ar c'hartier.

Monet a yis c'hoas pelloch, d'ar guær a Vosopa,
 Pini zo eus he divoal eur prinç eus an drola :
 Ur vanden chaç a merc'het en deus evit gardou,
 Ha n'en deus qen soudarded evit difen e vrò.

Ac'hane'yis da eur guær zo hanvet Estopet,
 Elec'h ma zeus serpentet ha loened vil meurbet
 Zo quer teo ha corf un den sur ma vent muzuret
 O devêus d'an nebeuta daou-uguent troated het

Er spaç demeus a gant vloas ez òn bet e vale,
 Ha me èruout adare em brò hac em c'hontre :
 Allas ! maro voa va greg coulz ha va bugale,
 Ha den ebet eus va brò certen n'am anavee.

Neuze e teuis da Rom, ebars en Itali,
 N amzer-ze e voa calz eus a c'hlac'henni ;
 Euelet 'ris marzeria nombr bras a gristenien,
 En desot ne renoncent d'o feiz ha do lezen

Me a vale var ar môr coulz ha var an douar,
 Ha me partiel neuze evit ar Franç, bro rar !
 HaMarseill, Lourdel, Paris, Niort, Naonet, Lyon,
 Ac'hane da Vreiz-Izel, d'ar guær vrao a Roazon.

Guelet e meus Montroulez ne voa nemet eur c'hood
 Ha güelet Brest ha Qemper ebars en douar prat.
 Ha güelet rr gær a Is en e frosperite,
 Hac ar gær a Lexovi a meus güelet ive.

— 6 —

Gület e meus Breiz-Izel en coad ha meneziou,
 Ma zoat evel sovajet neuze ebars er vrô ;
 Me a vel calz a guériou er vro-se batisset,
 A ra calz a chencharmant absoue ma zôn bet.

Me vel ar guær a Roazon eur guær gaer batisset
 Dol, Guenet ha Sant-Malo, Dinan hac an Naonct,
 Sant-Briec ha Landreguer, Lanion, Montroulez,
 Castel-Pol ha Lesneven ha Landerne ivez.

Ar c'hæriou ze meus gület e coad hac e prajou
 Pa deuis d'ober va veach qenta ebars er vrô ;
 Cetu batisset Qemper, ha Brest ha Recouvranc,
 Qemperle, Moelan, Kerahes ebars en assuranç.

Anfin, pa on condaonet gant Doue da vale,
 Me zo bet en em gavet e creiz meur a arme ;
 Canoliou a fusuliou, clezeyou, sabrennou,
 Neiraa ne dê bet capabl de rî din ar maro.

Bet on ebars en listri a zo bet perisset,
 Hac an dud a voa enne a meus gület beuzet,
 Ha me hanvet Boudedeo n'em bije drouc ebet
 Comzou Doue a râncô bea accomplisset.

Condaonet e zòn gantâ da chom var an douar ;
 Comprenit oil christenion, emâ zo din glac'har !
 Va zourmanchou er bed-mâ biжен na eeh'io
 Qen a deni Doue da varn ar beo hac ar maro.

Ar som eus a be...np goennec zc em godel bepret
 James ganen nep seurt elenved, me ne dòn attaqet
 Bet òn epars en broyou elec'h voa ar vocen,
 Hep na zeus staguet ouzin na elenvet nae anken.

Va boutou na va dillat james na uzont ket,
 Dre bermision Doue a meus bet offancet ;
 Peder guech meus redet pêvar c'horn ar bed-mâ,
 Ha gület a meus ive calz chencharmant ennâ.

— 7 —

Bremâ e zòn comanceet da redec a bempet,
 Hep ne dòn ambarasset gant dibri na cousset ;
 Guelet a meus bet broyou zo bet oll revinet
 Ha calz demeus a guærrou gant ar gurun d'êvet.

Ne meus qet calz amzer evit chom da barlant
 Me a gred e ma va zreid vargore glaou ardant ,
 Nan, ne zeus nemet Doue a else disclèria
 Ar boanniou bras a souffrân qerqent ma reposan

Pebes maleur è din-me bea bet rebuet
 Demeus a guichen va stal Jesus Salver ar bed
 Pa voa o vont d'ar maro, da zont da zisquiza,
 Ha me neuze dre valeur a zeuas d'e zispriza.

Emâ e ar maleur bras a meus var ar bed-mâ !
 E mòn atao o vale ousspen trivac'h kant vla.
 Ha c'hoas e ranqân bale ac'hant da fin ar bed :
 Pedit Doue evidon, ma zin d'ar joaüstet.

FIN.

